

Klask an Teñzoriou e Traoñienn al Leger

Un teñzor e beg ar gwez e Plounerin

Pegen diaes kavout ar guzhiadenn : etre
Tachenn : gwenojennoù tro-dro d'ar stank
2 eur e pado an hentad
Hirder an hentad : 3,5 km



© Déclic'Armor

Evel 'vez lâret amañ : « **Degemer mat !
e Mirva natur rannvroel « Lanneier, prajeier
ha stankoù Plounerin** ».

Hon anvioù zo *Mousse, Korse, Kellen* ha *Lierre* ha ganimp e vefet
heñchet evit klask an teñzor. Kezegened omp hag abaoe 2002
(n'eo ket yaouankaat a reomp...) emañ o vevañ war
dachenn Stank ar Vilin Nevez. Marteze ho po digarez da welet
ac'hanomp war vord ar wenojenn... Un dudi e vo deoc'h klask
anavezout ac'hanomp gant sikour hon c'hartennoù identelezh !

Emgav el lec'h loc'hañ, an avalenneg a zo a-
gleiz da **barklec'h Kerliziri**

A. LEC'H LOC'HAÑ : an avalenneg

Amañ emañ ar verje ! Plantet e oa bet gouennoù gwez-avaloù eus Breizh enni gant bugale Plounerin e 2016.
Graet eo al lec'h-mañ evit reiñ bod d'ur bern spesadoù plant ha loened, evel :



Pinted kabell
louet



Pokeriged-
kraoñ



Kalvenniged
glas

Amañ e kavont boued, ul lec'h da ziskuizhañ ha da ouennañ memes



Droed ho peus da zebriñ un aval a-raok mont d'ober tro ar stank (ma vezer d'ar mare ma vezont mat...) met n'it ket da reiñ un tamm dimp, bepred : dañjerus eo an traoù dous evit hon yec'hed !

Evit mont betek ar poent GPS kentañ, kit da bourmen, digor frank ho taoulagad, evit kavout ar seurt gwezenn-avaloù-mañ :

Titour 1^{añ} : 4
ger ac'h a d'ober
hec'h anv gallek

Eil titour : Heñvel a-walc'h
eo anv an avaloù-se ouzh
hini o c'henitervezed
« Rouanez-ar-renetez »



N'ho peus ket kavet ?
un titour diwezhañ
E-barzh hec'h anv e
kaver ur ger e
Breizh

Ur wech kavet ganeoc'h ec'h ay **niver al lizherennoù a zo en anv ar gêr-se** d'ober ar sifr a vank evit an daveennoù GPS amañ dindan, merket gant al lizherenn « **A** ». Lakait anezhe en ho GPS hag en em gavout a refomp en arsav kentañ !

Daveennoù GPS : N48°33'49.A" W003°33'38.1"



Ur sikour GPS a gaver
e fin an teul-mañ da
aesaat an traoù deoc'h
ma vez ezhomm



- Notennit an daveennoù GPS evit an arsavioù a vo goude, dezhe da vezañ aesoc'h deoc'h da ebarzhiñ
- Taolit evezh, ret eo mont gant ar wenojenn a zo en-dro d'ar stank ha pa vefe diskouezet un hent all gant ar GPS.

B. AR C'HROASHENT

D'ober petra zo ur roll evit ar chas amañ ? Iskisat tra... Ha ma sachfec'h warnañ evit gouzout hiroc'h ?



Ezhomm o deus al loened gouez da vezañ er sioulder hag e surentez e-pad ar bloaz. Evidomp-ni hon fevar, ne blij ket dimp kennebeut bezañ direnket pe foulet gant den ebet... Neuze n'ankouait ket ac'hanomp ha rollit ho ki **mar plij ganeoc'h** !

Gras da **niver al lizherennoù er ger diwezhañ** merket war ar roll e c'hallfet klokaat an daveennoù GPS (**B**) ha mont betek ar poent kentañ !

Daveennoù GPS : N48°33'4B.2" W003°33'4B.8"



Taolit evezh, ret eo mont gant ar wenojenn a zo en-dro d'ar stank ha pa vefe diskouezet un hent all gant ar GPS.

C. AR PEURIÑ

Lakaat loened da beuriñ zo mat kuit d'ar pradenoù ha d'al lanneier da vezañ gronnet gant gwez-haleg, pin pe gwez-derf. El lec'hioù-mañ e vez kavet boued ha bod gant al loened :



Bezañ zo **logod-dall** ha ne zebront nemet an amprevaned a gaver war ar c'haoc'h-kezeg, pe dost

An **devediged kabell du** a vez o neizhiañ er bodoù drez



Amañ zo meur a bradenn hag a vez dalc'het kempenn gant ar **peuriñ** :



En nevezamzer e teu 2 **Varc'h breton pounner** da sikour ac'hanomp da gempenn al lec'h. Ar re-se zo ur ouenn eus ar vro.



Peder c'hazeg omp-ni, eus ar ouenn gezeg **Camarga** hag amañ e vezomp a-hed ar bloaz. Talvoudus omp rak brav eo dimp bezañ hon zreid en dour, ar pezh a zegouezh mat gant an takadoù gleb war vord ar stank.



En hañv e teu ivez 8 buoc'h **Highland-Cattle** da sikour ac'hanomp. Ur ouenn rust eo hag a zebr drez yaouank ha gwezigoù.

Grit diouzh ar pazenoù-mañ evit klokaat an daveenoù GPS :

- 1- **Pet loen** a vez o peuriñ amañ d'an **22 a viz Mae** ?
- 2- **Lieskementit** niver al loened a vez aze dre **niver ar c'harnioù** en deus pep hini eus al loened-se
- 3- Evit echuiñ, **daougementit** an disoc'h evit kavout an niver a zo ezhomm evit klokaat an daveenoù GPS (C)



Daveenoù GPS : NC°33'37.6" W003°34'04.5"

Taolit evezh, ret eo mont gant ar wenojenn a zo en-dro d'ar stank ha pa vefe diskouezet un hent all gant ar GPS.

D. AR PONT KOAD BIHAN



C'hoant ho peus da zeskiñ penaos anavezout un toullad seurtoù gwez ?

Lakaet zo plakennoù e-harz darn eus ar gwez war-dro 500 m a-hed ar wenojenn. Sikouret e vefet gante da anavezout ar seurtoù gwez gant o anv hag o ferzhioù pennañ.

Ar sifr a vank evit klokaat an daveenoù (D) zo **a-drek plakenn** ar wezenn-mañ :
« **Dantek eo ma delioù met n'eo ket gante e vezer flemmet...** »

Daveenoù GPS : N48°33'5D.3" W003°33'48.3"



Taolit evezh, ret eo mont gant ar wenojenn a zo en-dro d'ar stank ha pa vefe diskouezet un hent all gant ar GPS.

E. E-HARZ AR C'HELVEZ

Sellomp a-dostoc'h bremañ ouzh ur seurt bronneged ha n'eo ket anavezet nemeur : ar Grilianed. El levrig e kavfet fichenn identelezh ar spesad disheñvel-mañ !

Sot eo ar Grilianed gant ar c'hraoñ-kelvez. Goude bezañ debret anezhe e lezont merkoù dibar warne ; diwar se e c'haller gouzout emaint en ul lec'h bennak. C'hoant ho peus da vezañ evel un naturelour hag a vefe o klask ha Grilianed zo amañ ? Klaskit war-lerc'h kraoñ-kelvez merket gant Grilianed e-harz ar c'helvez, a-raok ar pontig koad !



Evit mont d'ar poent kentañ e rankit **kavout ar graoñenn-gelvez merket** gant ur Grilian. En he c'hichen e vo diskoachet ar sifr a vank evit klokaat an daveennoù GPS (E), sur a-walc'h...

Daveennoù GPS : NE8°3E'01.6" W003°33'E2.1"



Taolit evezh, ret eo mont gant ar wenojenn a zo en-dro d'ar stank ha pa vefe diskouezet un hent all gant ar GPS.

F. E PENN-KREC'H AR PONTIG PESKETA

Emaoc'h dirak ur panell ma tispleger penaos e vez meret ar stank. Berniañ a ra al lec'hid er stank : ma ne vez graet mann ebet ne vo ket dioutañ ken a-benn 30 vloaz... War ar panell e lennfet penaos e vez meret al lec'hidañ war un dro gant al loened hag ar plant a bep seurt... Mechañs ho po plijadur o lenn !

Pet lizherenn ac'h a d'ober anv ar stêr a zinaou er stank ? Lakait ar respont e-plas al lizherennoù « F » hag en em gavout a refomp lec'h m'emañ an teñzor !

Daveennoù GPS : N48°FF'45.9" W00F°FF'F0.4"



Taolit evezh, ret eo mont gant ar wenojenn a zo en-dro d'ar stank ha pa vefe diskouezet un hent all gant ar GPS.

Evit kavout an teñzor e c'hallit delc'hen da vont gant ar wenojenn « En-dro d'ar stank » pe mont gant hent al lanneier. Ur wech arru er poent GPS, digorit mat ho taoulagad evit klask an teñzor !

**Kavet ho peus an teñzor ?
Gourc'hemennoù deoc'h !!**

Fellout a ra deoc'h ober un dastumad teñzorioù ?

Avanturioù all zo da vevañ a-hed traoñienn al Leger.

Ti an douristed Aod ar Vein Ruz.

02 96 05 60 70

www.bretagne-cotedegranitrose.com

Burev titouroù touristerezh Benac'h. 02 96 43

01 71

www.guingamp-paimpol.com





Fichenn identelezh ar Grilianed

Bevañ a ra ar Grilianed (*Muscardinus avellanarius*) en dangoadoù stank, er bodoù drez, er girzhier pe er strouezhegoù spenn-du en arvor. **Gwarezet** int hag e Breizh emaint **en arvar** koulz lavaret.


Debriñ a reont a bep seurt traoù, gant ar pezh a zo ezhom : mouar pe frouezh bihan all, alamandez, mein pabu hag irin, broñsoù, kraoñ-kelvez hag amprevaned memes.

Ne vez ket aes gwelet anezhe, ar mod gwellañ da c'houzout hag-eñ zo Grilianed eo klask restajoù unan eus o meuzioù muiañ-karet : **kraoñ-kelvez** !




Al lec'hioù ma vev Grilianed e Breizh

Penaos anavezout ur graoñenn-gelvez merket gant ur Grilian ?





Taolit evezh, arabat meskañ gant ar pezh a vez graet gant krignerien bihan all, evned pe amprevaned :



*Curculio
nucum*

in

Muenned
boutin

Pennglaoued
boutin

Morzigelled

Gwiñvered
rous

Ma tegouezh ganeoc'h kavout kraoñ-kelvez merket gant dent Grilianed e c'hallit kas anezhe d'an **SBB** (Strollad bronnegourien Breizh), dezhe da **glokaat o zitouroù** !

Evit kas kraoñ-kelvez merket gant dent Grilianed d'an SBB :

- Kas anezhe en ur pakad dre ar post asambles gant ar **fichenn ditouriñ** da Strollad bronnegourien Breizh.
- Lezel anezhe, asambles gant ar **fichenn ditouriñ** e sez an SBB pe en unan eus e skourroù.

Darempred SBB (www.gmb.bzh) :

Sez rannvroel : Ti ar Stêrioù, 29 450 SIZUN – 02.98.24.14.00. – contact@gmb.bzh


Skourr Aodoù-an-Arvor : 10, bd Seigneg, 22 000 SANT-BRIEG – 02.96.61.06.64.



Sikour GPS

Evit klask an teñzor ho po ezhomm d'ober gant ho **pellgomzer hezoug** a ray evit GPS pe gant ur **GPS hag a c'hallit amprestiñ digant Ti an Douristed.**

E pep arsav e kavfet un tamm c'hoari hag a ray deoc'h dastum titouroù evit skrivañ **daveennoù GPS** an arsav a vo goude hag evel-se ec'h afet betek an teñzor !

Ur skouer eus implij ar GPS Google Maps gant ur pellgomzer :

1. Gweredekaat lec'hiadur GPS ho pellgomzer
2. Digeriñ an arload Maps
3. Skrivañ un hent bennak 
4. Choaz "**war-droad**" e-mesk ar modoù da vont a zo kinniget 
5. Merkañ al **lec'h m'emaoc'h** ha **da belec'h** emaoc'h o vont




Taolit evezh pa vezit o skrivañ an daveennoù **GPS** !
Evit **Google Maps** e vez skrivet al lizherenn reteriñ er fin !

6. Kemer penn an hent ha kerzhet betek an arsav kentañ !



Ha pa vefe diskouezet deoc'h gant ho GPS mont gant an hent pe gant ur wenojenn all eo ret deoc'h **mont gant ar wenojenn a ra an dro d'ar stank** ha merket gant ar panneloù « **En-dro d'ar stank** ».



Kartenn identelezh ar c'hezegenned Camarga

Ma anv zo **Lierre** ! Ganet on e 2000 ha hervez kont e vefen an hini lipousañ diouzhimp hon feder !

Kellen eo ma c'hoar henañ, ganet eo e 1999. Gouher eo ha plijout a ra dezhi chom koachet adrekomp.

Korze zo ganet e 1999 ivez. An hini skoempañ eo, biken ne lezo den da flourañ anezhi ! Er c'hontrol eo **Mousse**, ganet e 2001, a zeu da saludiñ ac'hanoc'h an hini gentañ, sur ha neket marteze... ma ne vezomp ket da vat gant hon merenn !



*Gouest e vi
d'anavezout
ac'hanomp ?*


Kell



Ur **bailh (tarch)** roz strizh ha hir zo war ma muzell ha ma fenn. Ouzhpenn-se eo hanter wennn ma c'harn dehoù a-drek

N'eus nemedon hag am eus un **tarch bihan roz em fronell dehoù**. Kement ha sikour ac'hanoc'h c'hoazh, ma c'harn dehoù a-drek zo gwenn penn-da-benn

Mouss



Evel Kellen em eus ur **bailh roz hir ha strizh** war ma muzell ha ma fenn, met **du eo ma fevar c'harn**.

Ouzhpenn-se emañ ma **bailh roz un tamm a-gleiz**

Kemmesket e vezan a-wechoù gant Mousse met **du eo ma 4 c'harn ha roz eo ma muzell, tarchoù du bihan warni**

Kor

